

Roue ha rouanez an ozeganed

Get Daniel Carré



– Lodenn 1 –

E yan da lâret deoc'h un istor am eus klevet get ma zud kozh. Ha ma zud-kozh, int ivez, o doa he c'hlevet get o zud-kozh. Hag 'vel-se a rummad da rummad... Kozhik-mat eo an istor-se, neuze. Ken kozh mand eo kazi ankouaet, en desped dezhi bout brav ha kentelius a-walc'h... Met, selaouit kentoc'h ! Ur wezh e oa, gwerso-bras enta, e oa un aotrou pinvik. Hag ar pitaod-se en doa graet sevel ur c'hastell e-kreiz ar c'hoadoù... Lâret e raer mem e oa e koadoù Kamorzh en doa-eñ er savet. Posupl a-walc'h, rak routoù ur c'hastell a gaver eno, gwir eo... Afe ! ne verna kalz atav... Er c'hastell-se, e veve an aotrou ha daou zen kozh : ur vatezh hag a zalc'he an ti, hag ur mevel hag a rae àr dro al liorzha hag al loened ; rak loened e oa : ur c'hi jiboes, pevar marc'h-dibr hag ur jav bidet... Dam ! labour o deveze o-daou evit tapout e pep lec'h ; ar mevel sur-tout, abalamour d'ar liorzha ; rak ur pikol mell liorzha a oa... Get ur vagoar uhel tro-dro dezhi, get alezioù kempennet, plañchadoù boketoù, leton, gwez... Kaer e oa, ur bamm !...

An aotrou n'en doa kazi darempred ebet get tud ar vro ; gwir eo en doa savet e zemeurañs donik-mat er c'hoad... Ken don ha ken pell ma n'en doa tro den ebet da baseñ dre eno. Met kement-se ne rae ket kalz a boan dezhañ, ha beviñ a rae 'vel-se disafar ha diamen get e vatezh, e vevel hag e... evned. Ya, get e evned !

Sot e oa an den get an evned !... Ken sot ma en doa lakaet en e soñj dastum en e gastell kement sort lapous a gaved dre ar bed a-bezh !... Soñjit 'ta !... Abaoe blezadoù e rae degas dezhañ lapoused ag ar bed a-bezh ; lapoused bev da lakaat en e liorzha ; lapoused marv, ha treset a-feson, da lakaat e pep korn er c'hastell : er salioù, en trepasioù, er skalieroù... E pep lec'h e vezent kavet, marv ha treset-kaer en o fluñv... Ha plijadur pemdez an aotrou a oa sellet doc'hte ha gelllet lâret :

— Tout emaint din-me ! Ken nemedin-me !

Koulskoude, ma plije dezhañ e enved dreset-kaer n'eo ket gete e kave e blijadur vrasañ ; get lapoused al liorzha ne lâran ket... Pep mintin, goude e droiad dre ar c'hastell, e tiskenne betek al lec'h ma oant dalc'het. Rak, dalc'het e oant, forset-mat !... Penaos e vehe bet mod-arall ?... Ur c'hloz ispisial, ur pezh mell kavidell, en doa graet sevel en e liorzha : ur prad a-bezh a oa bet klozet... Ya,

ur prad get geot, gwez, bokedoù a oa bet serret kloz ha kloz get orjal kroaz-di-groaz, savet kostezioù tro-dro get grilhaj munut hag un doenn àr-dreist... Ur c'hloz, ur gavidell uhel a-walc'h da nijal, frank a-walc'h da vale ha da neizhiñ, get un ti-klud da zistreiñ doc'h ar fall amzer. Biskoazh bravoc'h !... Bemdez e tremene an aotrou euriadoù eno, é sellet doc'h e evned, é selaou doc'h o c'han hag o richan. Ha plijadur en deveze pa soñje :

— Tout emaint din-me ! Ken nemedin-me !

Ur goubañvezh-noz e oa an aotrou é tistreiñ d'e vaner. A-c'houde ar mintin e oant bet, e gi ha eñ, é jiboesaat er c'hoad. Met, kaer o doa bet redek ha furchal, n'o doa kavet netra ebet da jiboesaat. Setu e oa fallgountant ha dipitet an aotrou. Met, en un taol, 'vel ma tostae d'ar gêr, e teuas dezhañ gwelet daou evn barret àr lein ur bod kelenn... Daou evn ag ur sort n'en doa james gwelet. Ha bamet an den, sur a-walc'h, eñ hag a grede anavet rac'h lapoused ar vro... Lâret e vehe bet div voualc'h ; a-fet brasted atav, met dishañval a-grenn a-fet liv : unan e oa glas e bluñv a-bouez ur menier kribennn ruz ha melen àr e benn ; an arall e oa ruz e bluñv ha melen ha glas e gribenn... O ! Na brav e oant !... Ne vouljent ket, ne raent seblant ebet ; un tammig evel ma vehent bet é c'hortoz un dra bennak.

Hag an aotrou da ziskenn e fuzuilhenn d'o c'houchiñ. Met... *Flapp ! Flapp ! Flapp !*... A-raok ma en doa gellet o c'houchiñ e oa nijet kuit an daou evn davet don ar c'hoad.

— A !..., eme an aotrou, dipitet. Na koutant e vehen bet da gaout an daou-se ! Ul lec'h a-feson am behe kavet dezhe em c'hastell. Arc'hoazh me 'zay en-dro, ha ni a welo.

Neuze e voe klevet daou evn é kanal du-se, e don ar c'hoad. Ha dre o c'han en em respontent an eil d'egile. Kuzhet mat e oant ; ken ne oa ket forzh tu gouiet e-men en em gavent dre just.

— Biskoazh n'em eus klevet ar c'han-se ! a soñjas an aotrou. Oc'ho ! Daou evn ar bod kelenn, netra suroc'h... Na brav ! Na melodius o c'han !... Ha lâret em boa soñjet o lazhiñ ! Ne rin ket avat !... Ret eo din o zapout bev. O lec'h a zo em c'hloz. Eno, pa vint din, e c'hellin o gwelet hag o c'hlevet pa garin... Àrc'hoazh e tistroin get pevar den gopret ; ni a gemero ur roued, ha ni o zapo, sur.

Ha eñ da zerc'hel get e hent.

• • •

– Lodenn 2 –

Un tammig pellkoc'h en em gavas get pevar den é tonet a-benn dezhañ dre ar vinotenn. Ozeganed e oant o-fevar ; korriganed, mar faot deoc'h. Kement-se ne souezhas ket an aotrou : meur a wezh dija en doa bet tro da welet an dud vihan-se é vale dre ar c'hoad. Met, betek bremañ, n'en doa ket bet james afer doc'hte, na mem komzet doc'hte.

— Hama, jiboesour ! eme-int. Ha mat eo bet ho jiboes ?

— N'eo ket bet 'vat ! eme an aotrou. Tro wenn am eus graet. N'em eus ket tennet ur wezh seulamant... Neoazh, eh on é tonet a welet daou evn ag ur sort n'em boa ket c'hoazh gwelet er vro. Ha re vray, m'el lâr deoc'h ! Ha kaer

ha melodius o c'han !... Ken eh on bet bamet dezhe. Aes e vehe bet din o diskar get un tenn, met lakaet em eus em soñj o zapout bev evit o degas du-mañ da gavidell ma liorz.

— Ha pe liv e oant, an evned-se ? a c'houlennas un ozegan.

— Unan a oa glas, an arall a oa ruz.

— O, dam, aotrou, mad eo an evned-se ho peus gwelet ne gredan ket o zapahet james. Nann !... Gwell e vehe deoc'h o ankouaat hag o lezel da vevñ pelloc'h er c'hoad-mañ.

— Ha, ne rin ket avat ! Na ne rin ! eme an aotrou... Graet eo ma soñj, ha graet mat : din-me e vint o-daou, hag e klocz ma liorz o lakain. Ha, ma n'hellan ket o bout bev, m'o jiboesay get ma fuzilhenn ; ur wezh dreset a-feson e kavin lec'h dezhe em sal vras. Arc'hoazh e c'hoprin pevar den da reiñ an dorn din ; ni a gaso ur roued geneomp. Mar bezent c'hoazh àr ar bod kelenn o zapimp, sur.

— 'Vel ma karit, aotrou, a respontas an ozeganed. 'Vel ma karit... Met, klevit 'ta : mard eo pevar den a glaskit da reiñ an dorn deoc'h, ni a vo ho tud, mar karit.

— Oc'hoho ! C'hwi ! a eilgerias an aotrou. Farsal a rit moarvat ! Met, penaos sikour e vehed'h-c'hwi en afer-se ?... Re vihan oc'h. Dober am eus-me a dud ventet ha katapl da c'hoari get ar roued, tud ampart da sikour genin o fakiñ o-daou asampl. Ha c'hwi...

— Oc'ho ! eme an ozeganed. En em drompiñ a rit geneomp, jiboesour. Ni a zo-ni jiboeserion a-feson. Goprit-ni ! Keuz n'ho po ket.

An aotrou a reas e soñj kent respont :

— Ma !... Perak pas ? Atav n'em eus ket netra ebet da goll... Bezit er c'has-tell arc'hoazh vintin abred. Ni a leino asampl. Goude e kemerimp ar roued hag e teuimp d'ar c'hoad. En gortoz on e vo an evned àr ar bod kelenn da vihanañ.

— Hag e vint ! eme ar gorriganed. Hag e vint, sur ! Kenavo 'benn arc'hoazh.

Ha setu. An aotrou a zistroas d'ar gêr hag ar pevar ozegan a zalc'has get ar vinotenn betek al lanneier, en tu all d'ar c'hoad bras, lec'h ma en em gave o demeurañs.

An tronoz vintin ne oa ket diwezhat ar pevar ozegan ec'h erru er c'has-tell. Kaset e voent bet get ar mevel betek ar gegin lec'h ma oa dija an aotrou doc'h o gortoz. Ar vatezh a zegasas lein àr an daol ; ne vanke netra na da zebriñ na da evet.

— Sachit geneoc'h ! Debrit hardizh ! eme an aotrou. Dober hor bo a nerzh hag a ampartiz evit tapout an daou evn. Goude lein, ni a gaso geneomp ar pezh a voued a chomo àr an daol-mañ ; 'vel-se e c'hellimp debriñ ur begad bennak c'hoazh e-pad an devezh ma teua c'hoant deomp. Salv ma vo an evned er c'hoad da vihanañ.

— Hag e vint, aotrou ! a respontas an ozeganed. Hag e vint, sur ha serten.

Echuet lein en em lakazont en hent. An aotrou a gerzhe kentañ, ar sac'h get ar roued àr e skoaz. Ar pevar ozegan, int, a zae goude, pellik a-walc'h memestra evit gellet komz etreze hep bout klevet get o mestr.

— Breuder, a lârazont a-vouezh izel an eil d'egile, hon eus c'hoariet fin betek bremañ. Dalc'homp da c'hoari ken fin. Ni a sikouro ar jiboesaour pa dao-lo ar roued àr an evned. Met ne faot ket ma vehent dalc'het getañ, na bev na

marv. Kement-se n'hell ket bout, a gont ebet. Gouiet a reomp-ni piv eo an daou evn-se. Gouiet a reomp petra eo hon dever.

Pa oant arriv get ar bod kelenn e oa barret an evned.

— Setu-int ! eme an aotrou. Eh an da zispak ar roued ha m'en taolo àr-dreist ar bod kelenn. Pep unan ac'hanoc'h a redo neuze da grog en ur c'horn anezhañ evit en derc'hel doc'h an douar. Ma ouiit hoc'h afer, eh omp sur d'o bout o-daou er mem taol.

Hag an aotrou da aoziñ mat ar roued en e zorn ha... *Vioufff !*... d'en teurel parfet àr-dreist ar bod kelenn. Hag an ozeganed da redek, ha da grog pep unan en ur c'horn anezhañ d'en derc'hel d'an douar. Biskoazh bravoc'h an taol, met dipitusoc'h an disoc'h : achapet e oa an daou evn ! Ne oant ket bet dalc'het get ar roued !...

— Manket ! a huchas an aotrou, dipitet ha souezhet àr un dro, ken brav ma oa bet graet an taol. Manket !... Ha n'eo ket hiriv e vint gwelet en-dro... A ! Mallozh an diaoul !... Klevit 'ta, paotred ! Mard oc'h dibres eh on prest d'ho kopriñ, c'hwil ho-pevar, evit ur sizhuniad ; lojet ha maget. 'Vel-se ni 'zay d'ar c'hoad bemdez.

— O dam, aotrou, ur sizhuniad ne vo ket re ma talc'hit d'ho soñj tapout an daou evn-se. Met, kredit-ni, gwell e vehe deoc'h o lezel da vevañ trankil er c'hoad-mañ.

— Ne rin ket 'vat ! a respontas an aotrou. Din-me e vint ! M'en tou !... Hiriv n'hon eus ket bet boneur, met deiz pe zeiz hor bo. Petra 'lârit ?

— Dam, aotrou, ni 'zo-ni dibres a-walc'h. Greomp koumanant, mar karit. Ni a chomo geneoc'h e-pad ur sizhuniad.

Ha setu graet marc'had etreze hep chipotal pelloc'h.

An tronoù, hag an deizioù goude, e tistroazont d'ar c'hoad enta. Ha seul gwezh e kavazont an evned àr ar bod kelenn. Ha seul gwezh e c'hoariazont an taol roued biskoazh gwell. Ha, seul gwezh ivez e achapas an evned pa seblantent neoazh bout oc'hpenn aes da bakiñ. Ne oa netra da gompren... Dipitet ha fuloret ar jiboesour. Hag a zeiz da zeiz, a daol da daol manket e kreskae e zespedit hag e c'hoant : ret e oa dezhañ bout an daou evn-se ken burzhudus, ken souezhus, ken brav o c'han.

• • •

– *Lodenn 3* –

C'hwec'h deiz da renk e voe graet an taol ; ha c'hwec'h deiz da renk e oa afochet an traoù... An aotrou n'helle ket mui derc'hel àr e gounnar ; ken e fachas ruz get e vevelion :

— A ! Gasted ! Ozeganed milliget ! Dre ho kwall eo ma n'hellan ket o zapout. Kerzhit d'an diaoul !... Arc'hoazh e achuo ho koumanant, ha gwell a se ! Hag arc'hoazh e kemerin ma fuzilhenn. Gwell eo genin o lazhiñ hag o c'has genin d'am maner ; da vihanañ e vint din.

An tronoù avat, pa arrivazont dirak ar bod kelenn, ne oa evn ebet barret.

— A ! a huchas an aotrou. Trawalc’h, tudoù ! C’hwi eo a zo kaoz ma n’int ket aze, sorserien milliget !

— Àr ho koar, aotrou ! eme an ozeganed. Àr ho koar ! N’omp ket-ni sorserion... Gwir eo e ouiomp un tammig hiroc’h evit hor pater. Anavet a reomp meur a sekred é tenniñ d’ar bed-mañ ha d’ar bed arall, ar bed ma teua an daou evn-se anezhañ. Prest omp mem da sikour geneoc’h ur wezh oc’hpenn. Klevit ‘ta ! Achiv eo hor c’houmanant, met, evit diskouez deoc’h eh omp a volontez vat, eh omp prest da sikour geneoc’h un deiz oc’hpenn. Setu : erbat e vo donet d’ar bod kelenn arc’hoazh ; an evned ne vint ket aze. Ni avat, ni a oar-ni e-men e vint. Gellet a rahemp ho kas betek eno, mar karit.

An aotrou en doa klevet mat.

— A ! eme-eñ. Ma er gouiit, komzit distro ‘ta !

— Donoc’h er c’hoad e vint, a zalc’has an ozeganed. Àr ul lenn a zo eno e tremenint an devezh.

— Àr ul lenn ! a estlammas an aotrou. Àr an dour !... Met... trawalc’h e vehe neuze kemer ur c’hanod evit tostaaat dezhe hag o zapout bev. Na bra-vaet un taol e vehe !... Kasit-me betek eno ‘ta ! Kasit-me d’al lenn-se !... Met, trawalc’h evit hiriv ! Distroomp d’ar c’hastell. C’hwi a zebro ho koan hag a chomo da gousket.

— Chom da goaniñ ya, eme an ozeganed, met tremen an noz ne rimp ket ‘vat. Ret eo deomp distreiñ d’ar gêr ; eizhtez ‘zo emañ hor re hep doare ebet ac’hanomp ; mall eo deomp distreiñ devate.

Hag evel-se e voe bet graet. Goude koan e kuitaas an ozeganed ar c’hastell en ur brometiñ distreiñ abred an tronoz.

Koulskoude n’eo ket hent ar gêr a gemeras an ozeganed. Tamm ebet. E lec’h monet davet al lann lec’h ma oa o demeurañs e yazont donoc’h-don, pelloc’h-pell er c’hoad. Oc’hpenn sklaer e oa e anavent mat-tre rac’h an hentoù dre eno. Kerzhiñ a raent trankilik, disoursi-kaer, bourrapl ar gaoz etreze. Ne oant ket chalet tamm ebet get an tronoz. Hag evel-se e yazont tre betek al lenn o doa komzet anezhi d’an aotrou.

Hag eno, àr vord al lenn, e oa daou ozegan arall doc’h o gortoz. Hag int d’en em saludiñ ha d’ober joa an eil d’egile. Piv ‘oa an daou-se ? Roue ha rouanez an ozeganed e oant.

— A ! gourc’hemennou deoc’h, breuder ! eme ar roue hag ar rouanez. C’hoariet hon eus biskoazh gwell betek bremañ, c’hwi ho-pevar doc’h ho tu ha ni hon-daou doc’h hon tu. Ma talc’homp ‘vel-se e c’houniomp an taol. Ar jiboesour en deus lakaet e albac’henn geneomp, faot dezhañ hon tapout, groñs ha groñs. Bremañ ne ziskrogo ket mui ag ar pennad-se. Met kement-se n’hell bout, a gont ebet, a gont ebet... C’hoariomp fin, breuder ! C’hoariomp fin !... Arc’hoazh, pa arrivaet amañ, e vimp-ni daet da vout evned en-dro. Hag e vimp ec’h ebatal e kreiz al lenn. Ha ken hoalus e vimp eno ma lakaimp ar boulom da verviñ get ar c’hoant hag an avi ken ne gollo e benn.

— Diwallit memes tra, eme ar pevar ozegan. Komañs a ra dibasiantiñ.

— Bil ebet ! eme ar roue. Goulenn a ray geneoc’h lakaat ar c’hanod àr an

dour ha sikour getañ hor jiboes. Met, c’hwi a zegaso soñj dezhañ n’eus ket bet kaoz a gement-se etrezoc’h ; ken nemet a ziskouez hent al lenn. Mar venn bout ho sikour, goulennit getañ ober koumanant ; ur miziad amzer ar wezh-mañ. Asantiñ a ray, sur, rak ne vo ket evit en em zivrouilh e-unan get ar c’hanod.

— Mat a-walc’h, a eilgerias ar pevar. Met bezit àr evezh memestra. Katapl a-walc’h e vehe da denniñ àrnoc’h get e fuzuilhenn.

— Bil ebet, breuder ! eme ar roue. Ma koll pasianted, ni a nijo kuit ; eñ er gwelo ha eñ a zay àr hol lec’h. Bezit fiziañs ! Ni ‘zay da benn. Ha bremañ, mall eo deoc’h distroñ d’ar c’hastell mar faot deoc’h en em gavet d’an termen lakaet. Kenavo emberr.

Ne oa ket c’hoazh splann-mat an deiz pa en em gavas ar pevar ozegan er c’hastell. Goude lein e lâras ar mestr d’e vevel kargiñ ur c’hanod e-barzh ar c’harr ha sterniñ ar jav-bidet.

Hag int en hent. Erruet get ar bod kelenn, ne oa evn ebet.

— Hama, petra hor boa lâret deoc’h, aotrou ? eme an ozeganed. N’int ket aze hiriv. Dalc’homp da vonet.

Derc’hel a razont, atav donoc’h er c’hoad. Ken stank e oa ar gwez a-wezhioù ma ne oa ket aes d’ar jav ha d’ar c’harr tremen. A-benn ar fin en em gavazont ur seurt get al lenn. Hag, eno, e welazont an daou evn é vale àr an dour, é tarnijal du-mañ du-hont. Kanal a raent biskoazh bravoc’h.

An aotrou ne oa ket a zalc’h dezhañ.

— Hama ! Touchit buan, tudoù ! Hastit diskenn ar c’hanod ma yaimp dezhe !... C’hwi a roeñvo ha me o zapo get ma dorn. Aes e vo deomp tostaat : ne reont ket van ebet hor gwelet.

— Opala, aotrou ! eme an ozeganed. Hag ho pehe disoñjet ar gaoz bet etrezomp ? Kaoz e oa bet a ziskouez deoc’h hent al lenn. Netra oc’hpenn. Setu-ni arriv get al lenn. Hag hon eizhtez ‘zo tremenet : echuet eo hor c’houmanant... Ma vennit ma talc’hahemp e vo ret deomp ober marc’had en-dro.

— A ! eme an aotrou, hegaset. Koumanant ! Bout gopret ! Atav ar mem sonenn... hag an evned aze, ken tost deomp àr al lenn ! Ma... Petra ‘faot deoc’h ? Kinnigit un dra bennak ha ne gollomp ket amzer é chipotal.

— Hama... Ne ouier ket pegeit amzer a rankimp evit pakiñ an daou evn-se. Marse mem e vo diaesoc’h evit ar pezh hon eus gwelet... Lakaomp ur miziad amzer.

— Mat eo, eme an aotrou. Mat eo. Atav, ma n’o zapan ket bev me am bo-int marv. M’o lazho get ma fuzuilhenn. Ale ! deomp ‘ta ! Deomp ‘ta !... Diskennit ar c’hanod, lakait-eñ àr an dour ha deomp dezhe. C’hwi a roeñvo ha me o fako. Hag evel-se e voe bet graet.

E-pad euriadoù hag euriadoù e roeñvas an ozeganed. E-pad euriadoù hag euriadoù e klaskas an aotrou pakiñ an daou evn get e zaouarn pe en ur deurel ar roued àrne. Met netra d’ober !... Pa seblante dezhañ disoc’h a-feson get e daol e spluje an daou evn ken buan evel luc’hed hag e savent en-dro àr an dour pevar pe pemp metrad pelloc’h evit derc’hel get o ebat. Hag evel-se a-hed

an devezh. Pa yas an heol da guzh e savazont en aer ag an amzer, ha buan e voe kollet ar gwel anezhe.

Ar pevar ozegan a ziskoueze bout skuizh, vaen, hernet goude o euriadoù roeñvat. Unan anezhe a oa mem kouezhet el lenn ; ha mizer e oa bet en tenniñ ag an dour. Ar jiboesour, eñ, a verve get ar gounnar hag an desped : tro wenn ur wezh c'hoazh !... Pa en doa lakaet e dreid àr an douar e krogas da ober vil, da huchal ha da sakral :

— A ! gasted ! Ec'h oc'h ec'h ober genin ! An dall eo a c'hoariit din !... Sur on e ouiit kalz hiroc'h evit na lârit a-zivout an evned-se. Sorserion ! Lorberion ! Kerzhit kuit ! Pellait ac'halemañ !... Ne faot ket din ho kwelet ken ! Me a jiboesay ma-unan adalek bremañ. Ha sur em bo-int. Kenavo ha hep distro !

— Faot deoc'h en em ziblajiñ ac'hanomp, aotrou ! Met, kement-se ne vehe ket reizh : ur miziad koumanant hon eus geneoc'h... Klevit 'ta ! C'hwï, n'och ket daet a-benn da dapout an evned, gwir eo. Met ni a zeuahe marse. Petra a roahec'h deomp ma o degasahemp deoc'h betek ho liorzh ?

— Ma madoù, ma fortun, mar karit ! a huchas an aotrou, an tan en e zaoulagad. Prest on da zilezel rac'h ma zraoù ha ma danvez evit bout an daou evn-se.

— Mat, eme an ozeganed. Emberr ho po an daou env en ho liorzh. Distroomp d'ar maner. Arc'hoazh e vo gwelet.

• • •

- Lodenn 4 -

An tronoz e oa treset fall an amzer : glav bras, avel.

— Get an amzer-mañ, eme ar gorriganed, an evned n'en em ziskouezint ket. Da c'hortoz ma tay kaeroc'h e yaomp-ni da zistreiñ d'ar gêr. Ken emberr enta.

Hag int kuit.

Ne oant ket forzh avañset er c'hoad ma en em gavazont get o roue hag o rouanez ; cheñchet o devoa stumm arre, sur a-walc'h. Hag int d'en em saludiñ, d'en em vrec'hataat, da c'hoarzhiñ etreze ; just 'vel ma raer etre keneiled a oar e c'heller fiziñ mat unan en arall.

— Deomp d'ar gêr, eme ar roue hag ar rouanez. Diskennomp en hon demeurañs d'an diaz. Aze e vo peadra da zebriñ ha da evet. Ha ni a lâro deoc'h ar pezh hon eus da lâret.

Hag an c'hwec'h ozegan da vonet trema al lann lec'h ma oa o demeurañs d'an diaz, ar gêr dindan an douar ma vevent enni. Ur wezh paseet an treuzoù ha diskennet un nebeut pazennoù en em gavazont er gêriadenn.

Àr ar blasenn e oa un ti brasoc'h eget ar re all : eno e voent gortozet. Leun a dud a oa er sal vras. Daet e oa poblad an ozeganed a-bezh d'o degemer ha d'ober joa dezhe. Pep tra a oa bet kempennet evit ur chervad ; da zebriñ ha da evet netra na vanke ket.

E fin ar pred e komzas ar roue dirak an holl gouvidi :

— Enor ha trugarez deoc’h-c’hwil, ho-pevar ! C’hoariet mat ho peus, met n’eo ket echu an afer, rak, ma vehemp-ni tapet, ar rouanez ha me, e vehemp holl kollet. Setu perak emañ ret deomp en em glevet mat ha c’hoari fin mar vennomp disoc’h a-feson. Setu penaos e rimp. Àrc’hoazh e vo kaer a vintin. Pa vo debret lein, lârit d’an aotrou monet d’ober un droiad en e liorz. Aze e vimp hon-daou, barret e beg ur wezenn-orañj en alez vras. Ar jiboesour a zistroay d’e gampr da glask e fuzuilhenn. C’hwil, kit d’ar marchosi, kemerit ar pevar marc’h-dibr ha degasit-int e penn an alez. Krapit daou-ha-daou àr daou anezhe ; pa vo daet ar momant, ni a yay àr an daou arall, ar rouanez ha me. Ha ni en em denno avaze d’an daoulamm. Ma rit an traoù evel ma em eus lâret e vimp pinvik hag en hon aes, kredit-me.

Ar pevar ozegan a lâras e oant prest d’ober tre-ha-tre rac’h ar pezh en doa displeget ar roue. Int a guitaas neuze ar rouantelezh dindan an douar evit distreiñ d’ar c’hastell. Ne oa ket amzer da goll : e oa an noz ec’h achiv.

Kaer ha spis e oa an amzer an tronoz vintin.

— Ha neuze ? a c’houlenas an aotrou pa voe bet debret lein. Da ven eh aimp hiriv ? Prometet ho poa degas an evned din d’am liorz, me ‘gred.

— Gwir eo, aotrou, gwir eo. Tuchant, pa oamp é tonet, hon eus int gwelet o-daou é nijal davet du-mañ. Pechañs emaint arriv el liorz bremañ.

— Oc’ho ! lorberion !... Kement a istorioù ho peus livet din ma em eus poan krediñ an hanter ag ar pezh a lârit !... Met deomp da welet ! Mad int aze e tistroin da glask ma fuzuilhenn, ha setu.

Hag ar pevar ozegan hag an aotrou da ziskenn d’al liorz.

Pa oant en em gavet e penn an alez vras e voe gwelet an evn glas hag an evn ruz barret àr varrig uhelañ ar wezenn-orañj. Hag o-daou en em lakazont da ganal ha da richanal bravoc’h evit james.

— Hama, jiboesour ! eme an ozeganed. Setu aze ar pezh hor boa grataet deoc’h : emañ an evned en ho liorz. Deomp-ni emañ rac’h ho madoù bremañ. Klevet mat ‘peus ?

Met an aotrou ne gleve ket mui : e oa é redek d’e gambr da dapout e fuzuilhenn. An ozeganed, int ivez, ne chomazont ket da dortial. Redek a razont d’ar marchosi. Goude bout lakaet an dibr àrne, int a zegasas ar pevar marc’h da benn an alez vras, a bignas àr gein daou anezhe hag a chomas da c’hortoz, evel ma oa bet divizet.

Kement a herr ‘oa get an aotrou pa zistroas ma ne reas ket van get an ozeganed na get e bevar marc’h-dibr é c’hortoz e penn an alez. Du-se, un tam-mig pelloc’h, àr beg ar wezenn-orañj e talc’he an daou evn da ganal a-bouez o fenn.

— Ac’ha ! a skrignas ar jiboesour. Ar wezh-mañ e vehet din ‘velkent !

Kouchet en doa. E yae da lezel an tenn... *Flap ! Flap ! Flap !*... An evned da sevel a-dreist ar wezenn-orañj, ha da zonet d’en em lakaat pep unan àr gein ur marc’h, ha *Dagedaou ! Dagedaou ! Dagedaou !*... int kuit d’ar pevarlamm-ruz davet penn arall an alez.

Pav !... An tenn ivez a oa aet kuit. Ha ken mat e oa bet kouchet ma kouezhas d'an douar barrig uhelañ ar wezenn-orañj.

— Mil mallozh an diaoul ! Manket ur wezh c'hoazh ! a huchas an aotrou. Kement-se n'hell ket bout !... Ozeganed milliget ! E-men eh oc'h 'ta ? E-men eh oc'h ?... Oc'ho, treiñ a rin da sot geneoc'h !

Blejal a rae, sailhal a rae d'un tu ha d'an all. Lazhiñ a reas e gi na arsave ket a yudal, spontet ma oa ar paour kaezh loen get abadenn e vestr.

— Mallozh an diaoul ! Mallozh an diaoul !... Gortozit, ozeganed brein ! Laeron ! Trubarderion !... Met na lezin tra ebet geneoc'h. Tra ebet !... An tan ! An tan e pep tra.

Hag e redas d'ar grañj lec'h ma oa ar plouz hag ar foen. E yae da strakiñ an alumetenn pa zas unan bennak da arrestiñ e vrec'h. Roue an ozeganed e oa.

— Opala, ma den !... Ankouaet 'peus ho kratadenn ? N'oc'h ket mui ar mestr amañ. Rac'h ar pezh a oa deoc'h a zo deomp bremañ. Skarzhit avamañ ! Doc'htu !... Gellet a rit kemer ar jav-bidet. Krapit àr e gein ha kerzhit àr-raok. Ha ne verno ket bras an hent a gemerhet ; ne vo ket gwall vat anezhañ, m'el lâr deoc'h. C'hwi a gouezho er skosell gentañ a gavahet. C'hwi a vo gloazet en eil. C'hwi a varvo en deirvet. Kenavo da viken !

Adalek neuze e teuas an ozeganed da vout mestr àr ar c'hastell, àr al liorz hag àr rac'h ar pezh a oa e-barzh ha tro-dro. Digor a razont kloz an evned da bep unan anezhe da zistreiñ d'e vro ha d'e glud. Chom a reas gete ar vatezh hag ar mevel da zerc'hel o zraoù e stad, rak int, ozeganed, ne c'houlennent ket labourat a gont ebet. Atav, perak o dehe labouret ? Netra ne vanke dezhe ! Kreskaet o doa mem o flijadur peogwir o doa bremañ un demeurañs d'al lein, dindan heol an amzer. Koulskoude, n'eo ket evit kement-se o devoa dilezet o hini kentañ, an hini d'an diaz. Lies mem e tistroent du-se da chervadiñ ha d'ober ar sabat etreze, atav get o roue hag o rouanez.

Setu penaos e rankas ar jiboesour, aotrou kastell ar c'hoad ha dastumour evned, lezel rac'h e zanvez get ozeganed al lann. Eñ-mem a oa bet pennkaoz d'e rivin dre ma oa bet foll a-walc'h evit en em lezel da vout konduet get ar c'hoant hag an avi. Disoñjet en doa al lavar kozh : An nep en em lez d'an avi lies e kouezh àr e fri.

Ha setu echu ma istor !... He c'hredit pe na rahet, kement-se n'em sell ket.

Framm (neudenn, darvoudoù, divizoù etre an tudennoù...) ha tudennoù, amprestet er gontadenn **Le roi et la reine des korrigans**, embannet d'an ao. Lavenot, person Kamorzh, er **Revue des Traditions populaires** ; klevet e oa bet getañ en e barrez tro 1890. Adframmet, pinvidikaet ha savet e brezhoneg evit bout lennet a vouezh uhel dirak an dud.

D. Carré ; 03.2026



*Evit selaou doc'h an enrolladennoù, skannit ar c'hodoù QR,
pe kit àr www.tidouaralre.com
(klikit àr an ivinell « Bibliaudio » el lein).*

Lodenn 1 :



Lodenn 2 :



Lodenn 3 :



Lodenn 4 :

